

KIS-392 – Gl. (-)latéral(-) er Vezekniezh.

(GE – 01 05 91)

Meur a gemeradur zo d'ar Gl. **latéral** hervez m'en arverer er Gorfadurezh, er Surjianerezh, en Nervoniezh, h.a.

A. – En egor ar c'horf e-keñver un ahel kreiz a-zerc'h.

A1. – Er Gorfadurezh, e keveneb ar PNA (sl. GEGO.) La. **lateralis** ouzh **medialis**, Gl. **moyen, interne** ouzh **latéral, externe**, Br. **kostezel** ouzh **kreizel**.

Sk. : La. **nervus plantaris lateralis**, Gl. **nerf plantaire externe**, Br. **nervenn a-sol kostezel** ; La. **nervus plantaris medialis**, Gl. **nerf plantaire interne**, Br. **nervenn a-sol kreizel** (GEGO., p. 125).

A2. – Er Surjianerezh, da aroueziñ un dilec'hiañ diouzh ar roud kleiz-dehou pe dehou-kleiz. Da skouer, da heul torradenn pe weadenn an ufern, e c'haller, o terc'hel ar c'har diloc'h, dilec'hiañ an troad war-gleiz pe war-zehou, hag e komzer eus Gl. **glissement latéral du pied sur la jambe**, Br. **rikladur war-dreuz eus an troad war ar c'har**. En degouezh-mañ e keveneber daou roud d'an dilec'hiañ :

- a) Gl. **latéral**, Br. **war-dreuz (war-gleiz pe war-zehou)** ;
- b) Gl. **sagittal**, Br. **war-saezh (war-raok pe war-dreñv)**.

B. – En egor ar c'horf e-keñver ur blaenenn saezh a-zerc'h.

Er c'heñver-mañ e teseller an daou ledkorf (an div hanterenn gorf) kleiz ha dehou.

B1. – Pa vez tizhet ul ledkorf (Gl. hémicorps) hepken e komzer e Gl. eus **atteinte unilatérale**, e Br. eus **tizhad untu pe tizhad ledkorf**.

Heñvel dra, pa reer anv eus hanterenn dehou pe gleiz ul lodenn eus ar c'horf, e reer gant Br. **untu** pe **led-**, sk. Gl. “algie vasculaire **latéralisée** (cranio-faciale)”, Br. “laur gwazhiedel **untu** eus ar penn, laur gwazhiedel eus al **ledpenn**”.

B2. – Pa vez tizhet an daou ledkorf war un dro e ra ar Gl. gant **atteinte bilatérale**, Br. **tizhad daoudu** pe **tizhad daouledkorf**.

B3. – Da zoareañ ul lec'h en ul ledkorf e-keñver ul lec'h el ledkorf all, e reer anv a Gl. **controlatéral**, Br. **eiltu**. Da skouer, ur seizi el ledkorf dehou a vez peurliesañ devoudet gant un anaf en hanterenn empenn gleiz ; ur **seizi eiltu** eo.

B4. – Da zoareañ ul lec'h en ul ledkorf e-keñver ul lec'h all en hevelep ledkorf, e reer gant Gl. **homolatéral**, Br. **kendu**.

Sk. : Gl. “Certaines lésions bulbaires provoquent des paralysies **homolatérales** des nerfs crâniens”, Br. “Anafoù 'zo en hirvel a zevoud peluzioù **kendu** en nervennoù a-glopenn”.

B5. – Degouezh arbennik, o lakaat e penn kont trec'helezh arc'hwelel un hanterenn empenn war eben, an eil ledkorf war egile.

E-keñver gerluniañ ez eus daou dreug gallus :

B5a. – Pe loc'hañ diwar an termenoù Br. **kleiziat**, **dehouiat** ha sevel **tu(i)at** dre un argerzh a zazvellekaat¹ o wiskañ warnañ ar ster : "(den) a zo dezhañ trec'helezh arc'hwelel gant unan eus e ziv hanterenn empenn, e zaou ledkorf."

Br. **tu(i)at** aa., Gl. **latéralisé** "gantañ ul ledkorf trec'hel".

Br. **tu(i)adezh** b., Gl. **latéralité** (devoud bevedel) ; "bezañ tu(i)at".

Br. **tu(i)ata**, Gl. (se) **latéraliser** ; **latéralisation**.

Evit d'an diskoulm-mañ bezañ bastus e-keñver reolennoù ar gerlunierzh, e toujan na ve arvar a forc'hellegezh gant **tu(i)at** hag e zeveradoù. Kounaomp niver al luniadoù savet diwar ar stirann **-tu-** :

adu- "pro-".

aduaad "sympathisant" (*Emsav* 117, 332).

adukomunour "procommuniste" (*Emsav* 124, 41).

deduañ "gagner (à une cause)" (*Emsav* 92, 269).

¹ Daou lankad a ya d'ober an *dazvellekaat* : 1) An dinodiñ war ur gerluniad eus ur ster nad eo ket dezreadus diouzh ster e gedrannoù : amañ, keal an "drec'helezh arc'hwelel" n'edo ket rakvezant er c'hedrannoù **kleiz-**, **dehou-**, **-(i)at** ; dre se e reer eus **kleiziat**, **dehouiat** termenoù *divellsteriek* pe, krennoc'h, *divellek*. 2) Ober evel pa vije *mellsteriek* pe, krennoc'h, *mellek* an daou dermen (o *dazvellekaat* enta), eleze treuzkas al lostger **-(i)at** da luniañ termenoù nevez oc'h azderc'hel warnañ ar ster gounezet e-barzh **kleiziat** ha **dehouiat**. Sl. KIS-303, La-08, p. 206, ur skouer a *dazvellekaat* deskrivet, e diouer an termen-mañ, evel "tredizhadur an deveradoù".

eiltu "controlatéral" (GEVE.ms.)
erduañ (gant) "se rallier (à), rejoindre" (*Emsav* 44, 259).
erdu : en – "à l'intention de" (KIS-346, La-08, p. 349).
erduad "intention" (id., ibid., p. 347).
erduañ (da) "tendre (vers), avoir l'intention (de)" (id., ibid., p. 346).
gindu "de sens contraire" (SADED Fiz 3, 1 ; Da-63, 33).
kendu "homolatéral" (GEVE.ms.)
tuad "tendance (dans un parti)" (*Emsav* 32, 255).
tuadur "tendance" (*Emsav* 24, 351).
tuañ "a) incliner ; b) détourner, réceler ; c) parquer" (NDBF ; *Preder, Emsav*, passim).
tuborz "ruelle de lit" (J. M. HENEU in *Preder* 179-180, 107).
tued "tendance, disposition" (VALL., 732 ; *Preder, Emsav* passim).
tuék "adroit" (TDE.BF., 644).
tuenn "accotement" (*Emsav* 4, 93 ; *Preder*, 64-65, 118).
tuéz "conjoncture" (*Emsav* 7, 187).
tuoni "réserve" (TDE.BF., 645) ; "recel" (VALL., 628).
tuva "parc de stationnement" (*Preder* 64-65, 118).
untu "de même sens" (SADED Fiz 3, 1 ; Da-63, p. 88).
untuek "partial" (VALL., 535).

Ken ne gredan ket tuañ gant **tu(i)at**, **tu(i)adezh**, h.a., ha pa ve ouzhpennet un **i-** en o c'hreiz, hag evito da vezañ berr hag aes da arverañ.

B5b. – Pe loc'hañ diouzh keal "trec'helezh arc'hwelel" (Gl. "dominance fonctionnelle") un tu e-keñver egile, hag ober gant ar rakger **han-** "disheñvel, a-ziforc'h" :

Br. **handuelezh** b., Gl. **latéralité** (devoud bevedel).

Br. **handuek** aa., Gl. **latéralisé** "gantañ ul ledkorf trec'hel".

Br. **handuegezh** b., Gl. **latéralité** "bezañ handuek, piaouañ handuelezh".

Br. **handuekaat**, Gl. (se) **latéraliser** ; **latéralisation**.

C. – Pa vez kel eus un organ korzennek, a-zivout an tuioù anezhañ a-gevenep d'ar pennoù.

Gl. **anastomose latérolatérale**, Sz. **side-to-side anastomosis**, Br. **dasforzhañ tu-ouzh-tu** "kehentaat div ganol, daou organ dre o speurioù".

Gl. **anastomose terminolatérale**, Sz. **end-to-side anastomosis**, Br. **dasforzhañ penn-ouzh-tu** "kehentaat div ganol pe daou organ dre stagañ penn an eil ouzh speur egile".

Gl. **colostomie latérale**, Br. **ezforzhañ diadu ar c'holon, kolonezforzhañ diadu** "digeriñ ouzh ar c'hroc'hen un tal eus ar c'holon".

Heñvel dra e komzer eus Gl. **colostomie terminale**, Br. **ezforzhañ diabenn ar c'holon, kolonezforzhañ diabenn** pa vez skarvet ur penn eus ar c'holon ouzh ar c'hroc'hen.